

CANTIK ZANT IGNAS

PATRON PAREZ ZINT-IGO

TON : *Itron Varia Porzou.*

DISKAN

*Zant Ignas, escop, ha merzer,
C'hui hon Patron benniget,
Ni deu gant eur galon dener
D'ho pedi, ha d'ho Caret !*

I

Guechall dirag ar vourevien,
Ha dirag eur marv euzuz,
C'hui a dalc'he stard d'ho lezen,
C'hui oe fidel da Jezuz !

II

Caër o devoe ho tourmanti
Gant toliou, ha goaperez,
C'hui ie gant ho hent dizourci,
Ho sorj gant ar zantelez.

III

Ha pa dent gant ho loenet goue
D'ho pruzuna penn-da-benn,
C'hui, ho taoulagad war Doue,
Gant joe ie d'ho diarbenn.

IV

Laret e rec'h a voez uhel :
« Ma eskern e vo malet ;
« Mes dre ma relegou zantel
« Ma zalver e vo meulet ! »

V

Pebez skuer vit ar gristenien
Coz, iaouank, pe bugale !..
Tro-war-dro sav enebourien,
Ha bourevien an ine !

VI

O zant eüruz, dous, ha nerzuz,
Disket demp, ni ho suppli,
Chom stag mad ouz calon Jezuz,
Ha dalc'her mad d'hen meuli !

VII

Laket da genta n'hon speret
Guir sklerijen, ha guir fe,
Evit zewel dreist ar stered,
Ha mont tre beteg Doue.

VIII

Laket don en hon c'halonou
Guir nerz, ha guir garante,
Evit hars ouz hon oll boaniou,
Ha bout eüruz mad goude.


IX

Laket c'hoas e kreiz hon c'honsians
Lezen gaër ar burete ;
Neuze ni zello gant fizians
War du an eternite.

X

Ho pennoz war hon tiegezou
D'hon unani de-ha-noz,
Ha goudeze, mont d'an envou,
D'ho caret, er Baradoz !

G. M. s. j.



IMPRIMATUR

Brioci, die 28^a decembris 1900.

LE PROVOST, vic. gén.